


# Pobl Vreizh

5L

Gwengolo-Here 1981 - niv. 136



E Bro-Iwerzhon (Nord),  
obidoù Kieran Dogherty,  
marw en toullbac'h d'an  
2 a vis Eost 1981, diwar  
diouveriñ boued...

Listenad 1<sup>añ</sup>

P. Le Grand, Pontchâteau	20,00
Kêr Vreizh, Grenoble (38)	20,00
Y. Talbot, Rostren	10,00
P. Le Gall	
Fontenay-sous-Bois (94)	20,00
G. Proust, Kemper	10,00
T. Perrot, Loktudi	30,00
Y. Oulc'hen, Karaes	20,00
J.-J. Monnier, Lannuon	20,00
E. Denes, Roazon	20,00
L. Kervoas, Lannuon	20,00
J. Perchoc, Lokournan-Leon	10,00
F. Danno, Perros	20,00
M. Riou, Lannuon	20,00
M. David, Roazon	110,00
P. Maugé, Bro-Swiss	20,00
J. Vinaixia, Bro-Spagn	30,00
X. Mordelet, Bro-Togo	25,00
H. Arzel, Brest	30,00
F. Kerrain, Gwengamp	10,00
L. Cevaer, An Ospital	10,00
D. Jegou, Gwened	20,00
P. Kersale, Dineol	20,00
H. Padrig, Grenoble (38)	50,00
H. Cornio, Kemper	30,00



bras. Ar faturennoù eo a gresk, ur spont. Ha kêr 'vez ober, e cham un toull er c'haf dalc'hmadi... Kement ha ken bihan m'hon eus ur c'heloù fall da gemenn deoc'h : red eo deomp kass an die diwar hon tîo, ha ken uhel eo savet ar bern m'eo red deomp krennañ an dispignou, didruez... Ha n'heller krennañ nemed en ur mod : dispign nebutoc'h. Setu perag, diwar an niverenn 136-mañ, ne zeuio POBL VREIZH er-maes nemed beb daou vis : talvezoud a ra an niverenn-mañ ewid mis Gwengolo ha mis Here eta.

Mantrus eo gwelad POBL VREIZH o vont da gelaouenn daouvisieg, ha mantret omp o vont gant an hent strizh-se. Mes n'eus diskoum all ebed, siwazh...  
Pegehid e pado marevezh ar « saout treud » ? N'omp ket ewid lãred. Poaniomp memestra da welad ar perag hag ar penaos eus an traoù...  
Bez' ez eo POBL VREIZH kasetenn vrezhoneg ur strollad politikel, an UDB. Ewiti da vezañ brezhoneg ez eo politikel POBL VREIZH, petra bennag ma vez kavet enni penna-douù na dennont ket wareun d'ar politik, penna-douù kulturel eta. Mes, dre ma 'z eo POBL VREIZH kasetenn ur strollad politikel, ne c'hell ket kaoud yalc'hadoù digant ar gouarnamant, dre hanterezh ar Chart, da skwer. N'eus ket kouezet ur gweneg toull e-barzh kef POBL VREIZH a-berzh ar Chart, eveljust. Bez' e c'hell ar c'helaouennoù kulturel (Al Liamm, Evid ar brezhoneg, Brud nevez, h.a.) c'hoari war dachenn un nebtuegzh bennag, na

boud ez eo diaes meurbed d'ur gelaouenn vrezhoneg roñ da intent e chom nebtu, paravis d'ur galoud hag a chome dinet'h kêr — betek newez so — gant amzer da-zont ar brezhoneg. Heb ober ar gont eus ar pezh a zo bet gwraet ewid henn lazhañ, hag ur burzhud eo n'eo ket aet da Anaon ar paourkaezh merzher, gant an taolioù kountell (ur gountell lemm...) bet plantet dezañ ken stank en e gorf. Skrivañ e brezhoneg n'eo ket an akt nebtu, goude ma vefe « nebtu » da weled an oll benna-douù moulet er gelaouenn-mañ-kelaouenn. Ha daw 'vefe'gall ewid lãred e vezont oll nebtu 'ne vezont ket. Ha koulskoude e vez roet dezo arc'hant eus ar Chart. Gwell-a-se, eveljust : un digoll eo, un digoll red, hag eñv dister ha berr meurbed...  
Sed e vez red da b/POBL VREIZH dont a-benn eus he jañ he hunanig penn. Harpet e vez gant an UDB, eveljust. Mes n'eus den ebed o kredñ ez eo an UDB ur strollad pinwidig... E Mezheven ez eus bet kaset ganti war ar renk 15 danvezkannad : 15 milion a lurioù kozh aet gant an awel. Ha koulskoude e oa RED d'an UDB ober he mad eus degouez ar botadegoù gall ewid strewiñ he mennosioù ha bezañ gwelloc'h anavezet...  
Sevel a ra UN niverenn eus POBL VREIZH da 10 000,00 L (ur milion kozh), pe wardro, pa vez lakaet assambles pris ar moullañ, heni ar misoù-kass, ar fotoù, h.a., h.a. Dont a ra betek kef POBL VREIZH wardro 5 000,00 L beb mis (komanantou, profadennou, niverennoù gwerzhet unan hag unan). Sed e vank 5 000,00 L BEB MIS...

**POBL VREIZH**  
KOMANANTOÙ  
komanant-bloaz : 50 L  
skoaz : adaleg 70 L  
estrenvro : 70 L  
an tamm : 5 L

**KRP ROAZON**  
2746-79  
CCP RENNES

T: Moulerez « Iroise »  
29200 Brest  
Rener ar gelaouenn  
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091  
1500 skwerenn

Emaomp eta, evel m'eo bet kemennet war niverenn 135 POBL VREIZH (Gouhere-Eost 1981), emaoomp o tigorñ ur roll newez a brofadennou da b/POBL VREIZH : en ur ober daou vis, ho peus kaset d'ar gasetenn 635,00 a lurioù newez, lennerion ha komananterion ger. Trugarez vras deoc'h oll.  
Ma 'z eo bet kresket komanant POBL VREIZH (50 L) hag iwe, eveljust, pris an niverennoù gwerzhet unan hag unan (5 L), n'eo tamm ebed dre ma vefe paotred POBL VREIZH o klask rastellañ arc'hant

Komanant d'ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn  
**Pobl Vreizh** (service abonnements \*)  
BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gess e gomanant  
Boutin : 50 L (1)  
Skoaz : 70 L pe ouzhpenn (1)  
Estrenvro : 70 L (1)

Amañ an arc'hant  
dre chekenn-bost (1)  
dre vandat-lizher (1)  
dre chekenn-vank (1)  
CCP RENNES 2746-79

(1) Diverkit ar gerioù na serjijont ket


Ahendall ez eus eus GOUEL POBL VREIZH. Abaoe ma'z eus anezañ, ez eo bet dalc'het e Mezheven. Forzhig arc'hant a vez red lakaad d'ober an dro arag ma komañs ar gouel, arag eta ma vo gonezet ur gweneg diwarnañ, hag ar pezh a vez ket gonezet ne vez rannet etre POBL VREIZH ha LE PEUPLE BRETON nemed pellig awalc'h goude ma vez bet achuet ar gouel. Hag er bloaz-mañ, gant bec'h bras ar politikerezh gall c'hoarvezet e Mezheven, eo bet daw d'an UDB peillaad GOUEL POBL VREIZH, ouzh e gass eus Mezheven da vis Here... Diwezato-c'h-a-se e teuy an nebeud gwenneien a vo lod POBL VREIZH da sikour stankañ an toull — bras — a zo e-barzh ar c'hel...  
Kavoud a ra deomp, lennerion ha komananterion ger, hon eus roet deoc'h da c'hoùd kement a oa red, deoc'h da gompren an enkadenn m'ema POBL VREIZH enni. Fiziañs hon eus e teuy war c'horre he bec'h. Da lãred eo e teuy POBL VREIZH er maes beb mis en-dro, an abretañ 'r gwellañ.  
C'hw'i 'vad, lennerion ger, dalc'hit, dalc'hit da gass ho tammig prof da b/POBL VREIZH. N'eo ket druz ar peuriñ ganeomp, sur n'eo ket c'hoazh ! Daw eo douarañ ar prad ! Diwar vremañ, trugarez vras deoc'h oll !

**D'AR SUL 11 a vis HERE 1981**

Deuit oll  
da NAONED, ewid goulen  
ma vo adstaget departamant  
kêrbenn Vreizh douzh ar peurrest  
eus Breizh

NAONED : 11-10-81 — NAONED E BREIZH :  
11-10-81 — EWID ADUNANIGEZH VREIZH :  
NAONED 11-10-81 — NAONED E BREIZH

POBL VREIZH



M'ho peus c'hoant da vont eus Brest da Naoned WAR DROAD, skrivit da Jil KILLEVERE (SAE), 16, str. Paul Borossi - 2900 KEMPER

## ROAZON :

### KERENT BUGALE O STOURM EWID AR C'HELENN BREZHONEG ER SKOLIOÙ

E mis Du 1979 eo bet krouet e Roazon an APEEB (Association des parents d'élèves pour l'enseignement du breton, 3, rue Edith Cavell, 35000 Rennes).

E penn ar gevredigezh emae JAKES COSQUER (amañ en e sav, war ar skeudenn). An enor hag ar c'hañs en deus bet Jakes Cosquer da zont war an douar er Vro Vigoudenn, er Gelveneg, e 1943. Martolod e oa e dad, hag e ur fritur e oa e vamm o labourad. Brezhoneg e vese gante, hag e komprenne mod awalc'h ar paotrig yezh e dud, petra bennag ma ne oa ket bet lakaet d'ober ganti : kroget oa ar vrezhonegerien, e Breizh-Izel, da zeskiñ d'o bugale yezh ar Stad, ha n'eo ket yezh ar vro. Deuet e oa ar gouarnamant a-benn d' « ober mez » d'ar vrezhonegerien abalamour d'o yezh, hag e kavos gwelloc'h ar re-mañ mont war ar galleg saout gant o bugale, kentoc'h ewid o lakaad — d'o meno — da vezañ, mezhekoat int-i iwe diwezatoch abalamour d'ar brezhoneg. Jakes Cosquer hag e gomaded ne vese nemed « galleg » gante, er skol eveljust, med iwe en e c'hoarioù... Red eo kompren : diases e vefe bet da dud pouar lakaad « yezh ar vezh » war c'houg o bugaligoù, en tu all da bouventez, ostias-dies penndezieg al labourer...

Tapet gantañ e bewarez vloaz, e sant memestra Jakes Cosquer pessorat talvoudegezh zo gant ar brezhoneg. Martese iwe e sant n'eus ket bet roet dezhañ da zebriñ ur meus e wele war an daol koulskoude... D'e driwech vloaz, setu ehw e lisse Colbert an Oriant, hag e-toues e gelennerien ez eus unan, **Piñ Bernard**, ur C'hasellad o kelenn ar « philo » eno, hag en deus ar vrasañ istim ewid ar brezhoneg. Gantañ e kiew Jakes Cosquer meur a dra a-boues diwar-benn yezh e dud, ur yezh hag zo iwe heni e gelenner, evel ma oa heni tud ar c'helenner-se... Kompren a ra Jakes Cosquer n'heller ket torriñ ar chadenn...

Aet war ar studioù uhel (« sciences éco »), setu Jakes Cosquer o vont e-barzh ar JEB (Jeunesse Étudiante Bretonne) e Roazon, hag ehw o ponnad da zeskiñ ar brezhoneg da vad. Laouen eo o tisoññ frammoù yezh e vro hag o tapoud evelse ment reizh e bersonelezh.

Achu gantañ e studi hag ur vriad diploma gantañ, goude bezañ bet o labourad



war e vicher e Kemper, emae bremañ mob martolod ar Gelveneg, abaoe 1976, er Prefetti-Rannvro, e Roazon, evel Enseller war ar Stummidigezh Diboues.

Kehid ha m'eo bet o chom e Kemper, eo bet Jakes Cosquer tost tre d'ar feunteun vrezhoneg. Ha daoust m'ema bremañ oc'h ober e zemeurañs e Roazon, ur gêr n'eus ket kêr brezhoneg emi nemed a-drugarez da Vreizhisel aet di, e chom Jakes Cosquer ken sod all gant ar brezhoneg. Ouzhpenn kement-se, setu ur verc'h dezhañ, unneg vloaz, o rouñ da c'hoñd d'he zad penaos e kav diases chom heb kompren yezh an dud pa vez ar familh e vakañsoù e Penn-ar-Bed, ha deuet c'hoant dezi deskiñ.

Jakes Cosquer ha mont neuse da gouvad rener skol publik « Boulevard de la Liberté » e Roazon, ha goullenn ma 'z eus tu da zeskiñ brezhoneg er skol-se, evel donvez diired « Possouñ eo », eme an Enseller Akademiezh, « bez' ez eus ur c'helc'hilzher ofissiel ouzh e aotren ». Buan, e 1979, e teu ur studier eus ar Skol-Veur d'ober ar c'hentelioù. 4 a skoldi da gomoñs, ha beteg 70 o c'houlenn bezañ enskrivet : an drederenn eus ar skol ! Kempenn tri live a roer : CE1, CM1, CM2. E 1980-81, ez eus

190 a skoldi o c'houlenn brezhoneg, 5 a skolarien d'ober war o zro. Er bloaz-mañ emae o c'hortos, e kêr Roazon, etre 900 ha 1000 a skoldi !

Kudennoù e-leizh ! An eurwezhioù, ar gelennerien... Setu e c'houlenn ar gevredigezh m'ema Jakes Cosquer en he fenn ma vo lakaet ar brezhoneg e-diabarzh an danvezioù-studi, ha n'eo ket evel un dra e-kichen...

Mont da welet tud e karg, skrivañ d'ar pennoù bras (Giscard hag all...) n'eo ket bet espernet o fann gant kerent bugale ar gevredigezh... Nac'hañ paeañ ar c'hentelioù he deus gwraet an Akademiezh. Gant an Ti-Kêr avad e teuas ur yalc'had a 20 000 a lurioù ewid 1979-80, unan all a 1000 L gant ar C'husul Jeneral, a bloaz warlerc'h : 30 000 L gant an Ti-Kêr, 5 000 L gant ar C'husul Jeneral, ha 25 000 L a-berzh ar Chart (meulet re vezo)...

Bremañ p'eo aet an tu kleiz e-barzh, pa'z eo bet aotreet da Skol-Veur Roazon al lissañs vrezhoneg, mechañs e teuo Jakes Cosquer hag e geneilid a-benn da lakaad ar brezhoneg da vleuniañ e skolioù kêr Roazon !

#### AR FALZ

kelaouenn drimiseg an Emsav diasezet gant Yann Sohier, bodet ennañ skolarion ha kelennerion Vreizh a-du gant ur skol vrezheg ha laik gwirion

Lennit Ar Falz ! Komantit d'Ar Falz !

(40L ewid 4 niv.)

AR FALZ, Str. Kan Ar-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRouLES  
KRP 430-20 H ROAZON

#### AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o rouñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennoù a beñ sort ha keleier 80 pajenn e peb niverenn - Rener : Ronan Huon

komant : 50 L - Studieren : 35 L  
Teñzorier merour : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-à-Chaux  
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

## Ur « ru Bobby Sands » e Brest hag en Oriant...

### IWERZHON

Bugale Belfast, Bugale Dery,  
Ha lãeret 'vefe bet digonec'h ar spi ?  
Prim en ho kalon e sav ar gounnar  
Kerent ma teu war wel skeud euzhus ur soudard.

Ur fusuilh ho peus bet da gentañ c'hoariell,  
Boledoù a yelo da heul da voueta ho presel,  
Gant enkes ho peus llwet diemm gwenn ho mammoù,  
Dre forzh c'hoari bemdez war dachenn an Ankoù.

Ho kresk ho peus gwraet en dienes, er feulster,  
Abalamour da vevrennoù direizh an Ulster  
A goss ahanoc'h a-wil vern d'al lazhadeg,  
Da c'hortos 'vefeh' trech' dre hoc'h emsavadeg.

Bugale Belfast, Bugale Dery


Ar barradoù glaw 'hed an noswezhioù du sac'h,  
A-veradoù, 'vergio barinier an toull-bac'h,  
Lec'h ma vev war yun a-dreñv tew a vogerioù  
Brogourien dispont o koutañ o deizioù.

Unan anezo, kannad, a c'hortos dihabask  
Na ma vrallo tãer adarre, kleier Pask,  
Re gousañvet en deus gwraet dismegeñs tud Londres:  
Kemenn e van' spontas ar bed a-bezh.


Bugale Belfast, Bugale Dery  
Ma fluenn, saubet e llw ar brisonidi,  
A goss deoc'h keloù eus stourmerien ma bro,  
Ewito, Bobby SANDS, nann, biken ne warwo.

Bugale Belfast, Bugale Dery

Noun bPloeven



Un trede disk gant J.-F. Quémener, ennañ adarre kanaoù ur Vreizh kozh kanet gant mouezh tener ha nerzhus ur paotr yaouank...



Un disk all gant Alan Stivell, sonerezh nevez war donioù kozh, e meur a yezh...

Komantit da gelaouenn c'hallec an UDB

**Le Peuple Breton** (service abonnements \*)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

Boutin : 50 L (1)  
Skoaz : 70 L (1)  
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandan-tizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2365-76

(1) Diwek'it ar gelaouenn ne servijont ket

# FESTIVAL EPSTEIN E DOUARNENES

Tost da zeg vloaz so 'm boa klewet hanw eus ar filmoù a vez pasket deomp abaoe ma 'z eus filmoù...

E gis all eo hemañ ur film didrous, ha pa gasein eus ar re all e komprenoc'h perag e skrivan ragtal eo gwel-a-se, a galz. Un tammig far-sus 'oa klewed un den o roc'hal er sal, digustum ma'z eo, sur awalc'h, da weled heb klewed. Med ewel-se da vihannañ ne vezer ket direnket gant soton an destenn pe ar mouezhioù parisian, na brewed gant sonerezh droch. Ha dre se eo hemañ ar film en deus tizhet ahanon ar muiañ.

A-fed aktouriezh eo anad n'oa ket tud a vicher eus ar c'hoarieren. Diouz un tu ez eus jestroù ar pem-deiz : dewiñ tali, sevel ar ouel, poulinad, a zo naturel dreist, ha braw tre. Seul vuioù 'h a se e vez santet ar pennadoù « c'hoariva », Rag, tud n'oa ket kenteliet e gis all, n'oa doa gwelet nemed pezhioù patronaj, ne oa dezo nemed ar mod c'hoari-mañ e gis skwer. Alesse pennadoù reud, gant jestroù gwraet hag adgwraet, evel serriñ an dorn da c'hourdrous un den. Med tu gwan damvad an oll filmoù mud ez eo. Ha n'eo ur film-mañ na falloùc'h na gwelloc'h eged ar peb brassañ eus ar re am eus bet tro da weled.

Ar pennadoù e **Eussa**, avad, 'm eus kavet falloùc'h, nebeutoc'h naturel, a galz. Douetis bras e vez diassoc'h bezañ d'ur bern figurant, eged dont d'en em glewed etre c'hwec'h pe seizh den war un

A-fed « gwirionez » avad, on bet gwall souezhet gant ar film, e-keñver ar pezh a anavezan eus ar vicher vezhin en inizi. Rag lakaet eo e-gis ma vefe paotred eus **Eussa** ar vezhinerien. Padal, d'ar mare-se (e 1929 eo bet filmet **Finis Terrae**), n'oa den alesse wardro ar vicher-mañ. Possibl eo e vefe bet araog, med **Pitiod**, ha kredabl bras an tri all, zo eus **Landeda**, ha ganet eno. Alesse e koez en un tamm ar steuenn, rag ne rae ket ar vezhinerien darempred gant **Eussa**, ha dre se ne vese ket daw treusñ ar **Fromveur**.

Med kær kernañ 'm eus kavet gwelet **Banneg** hag al labour vezhin. N'ouzon ket ha filmet int bet e gis all d'ar mare-se, med pennadoù a-bezh eus ar film zo gwir skudennoù buhez a dalvoudegezh vras e-keñver istor hag etnologiezh. Ha n'eo steuenn ar film (ur wech degemeret ar « fasi » diasez a zo dindan) na sotoc'h na gwelloc'h

eged heni ar peb brassañ eus ar filmoù a vez pasket deomp abaoe ma 'z eus filmoù...

E gis all eo hemañ ur film didrous, ha pa gasein eus ar re all e komprenoc'h perag e skrivan ragtal eo gwel-a-se, a galz. Un tammig far-sus 'oa klewed un den o roc'hal er sal, digustum ma'z eo, sur awalc'h, da weled heb klewed. Med ewel-se da vihannañ ne vezer ket direnket gant soton an destenn pe ar mouezhioù parisian, na brewed gant sonerezh droch. Ha dre se eo hemañ ar film en deus tizhet ahanon ar muiañ.

A-fed aktouriezh eo anad n'oa ket tud a vicher eus ar c'hoarieren. Diouz un tu ez eus jestroù ar pem-deiz : dewiñ tali, sevel ar ouel, poulinad, a zo naturel dreist, ha braw tre. Seul vuioù 'h a se e vez santet ar pennadoù « c'hoariva », Rag, tud n'oa ket kenteliet e gis all, n'oa doa gwelet nemed pezhioù patronaj, ne oa dezo nemed ar mod c'hoari-mañ e gis skwer. Alesse pennadoù reud, gant jestroù gwraet hag adgwraet, evel serriñ an dorn da c'hourdrous un den. Med tu gwan damvad an oll filmoù mud ez eo. Ha n'eo ur film-mañ na falloùc'h na gwelloc'h eged ar peb brassañ eus ar re am eus bet tro da weled.

Ar pennadoù e **Eussa**, avad, 'm eus kavet falloùc'h, nebeutoc'h naturel, a galz. Douetis bras e vez diassoc'h bezañ d'ur bern figurant, eged dont d'en em glewed etre c'hwec'h pe seizh den war un

enesennig.

Bez' ez eus iwe un nebeudig pennadoù hir ha diezomm : da lakaad tud poud da gompren ar pezh a vefe e spered an « aktourien ». Me 'm bije karet e vefe bet diskouezet deomp muioùc'h eus buhez ar vezhinerien.

**L'OR DES MERS**. An eil film, filmet e gwirionez warlerc'h **Mor Vran**, hon eus adarre unan hir, ouzhpenn un eurvezh. Nemed hemañ ez eus mouezhioù ha sone-rezh d'e heul. Siwazh !

Kavet 'm eus anezañ « melo » beteg re, ar pezh n'eo ket gwir eus **Finis Terrae** (en diavaes eus pennadoù zo gant merc'hed **Eussa**). Med, deomp dezi, a-nebeudoù...

Petra 'm eus kavet mad er film-mañ ? Wareeun, netra ebet. Dre dro avad o deus plijet din skudennoù « etnologiezh ». Med ur filmig pemp munut a vefe bet ken efedus all da ziskouez deomp dilhad an dud, o ziez hag o ostalerioù.

Amañ eo an istor a zo roet dezi an tu kreñv. N'eus netra all, pedost, da harpañ hon ewezh. Ha sklaer eo ne c'hell ket un den a-vremañ tañva kalz a dra kên er filmoù-se. Med divinañ 'ran eo tech an oll filmoù gwraet e penn kentañ ar bloavezhioù tregont.

Istor ur paotr kozh paour-razh eo, en **Enes Heudig**, hag a gav ur vouestig peñseet. Kuzhad a ra anezi, nemed eo bet gwelet. Kavoud a ra d'ar re all ez eo un teñzor. Klask a raont da lavared petra

eo. En aner avad : mervel a ra ar paotr diwar ur c'horfad boued ha boesson. E verc'h goude-se a rank pourchass ar vouest ma fell dezi dimeziñ gant an den a gar. Darbet dezi mervel en traezh bouk dre ma 'z a d'he fakañ, med saveteet eo. med saveteet eo.

A-fed istor eo un tamm mat muioùc'h diskredabl. Padal eh anavezomp oll traoù c'hoarvezet e gwirionez, hag a zo diskredaplouc'h c'hoazh. Peuc'h war se eta, rag, a-fed arz, ar pezh a gont eo ar mod da gennig ar steuenn.

Hag amañ n'eus ket kalz a dra da blijud din. Pe, neuse, c'hoarzhin er pennadoù sañset dezo lakaad an dud da lennañ douere hanterkant vloaz so. Ha meur a unan, warlerc'h gwelloc'h ar film-mañ, n'en deus ket klasket gweled an daou all !

Ken di-zesk ma 'z on war istor ar filmoù, e soñje din... mouezhioù... Gant un tammig chañs e vo klewet brezhoneg, hardizh... Ne ouien ket petra 'sinifie « son » d'ar mare-se. Rag ar vandenn son a vese gwraet er studio da c'houde. Lakaet e kichen, e-gis ma'z aje ur plastraj simant war gar ur plac'h yaouank ! da grediñ ez eus n'oa ket ijinet c'hoazh mikroioù da bouesañ nebeutoc'h eged kant lur... Klewet 'vez trous... Med ne zegouezet ket. Kalz gwashoc'h eged war filmoù zo, advouezhiet buan ha buan en ur yezh all, a welomp a-wechoù war an tele.

Setu brezhoneg !... Va Doue, tud **Heudig**, d'ar mare-se, m'o doa da gaoseal ouzh ar bed oll, a ranke kaoseal galleg flour, ha n'eo ket draihañ gwenedeg uhel.

Med amañ adarre e vefe red keñveriañ gant ar pezh a vese gwraet d'ar mare-se. Galleg komfo, ton **Paris** dezah, nemed... hag eno e c'heller kaoseal eus perlesennoù taolet d'ar moc'h, ul lastez trioù-lavar plouk koñvañsionel : ar mod galleg « diwar ar maes » a ranke an aktourien distagañ p'o doa da vevañ peisanted en ur c'hoariva e **Paris** d'ar mare-se (e penn kentañ o c'harierenn, sur awalc'h !). Dija, da vare **Molière**, e kaosee an « oll dud » eus diavaes **Paris** ur gallegaj opera, n'eus forzh eus pelec'h e vefent, hag a zegas da soñj din « yezh » Indianar ar westernoù. « J'avions point... » ha me 'oar-me. Diaes da lonkañ, n'eus forzh penaos.

Ewid pezh a sell ouzh ar sone-rezh, petra da skrivañ, nemed... ez eus. Re ! Bouzaret e vezomp gant

sonerezh dramatik (eno iwe ez eus koñvañsionoù loc'het d'ar mare-se, hag a zo chomet ganeomp, anfin... gant paotred **Hollywood-Chewing-gum**, hag o marmouset). Sonerezh n'he deus netra da weled gant Breizh, na gant istor ar film.

A-fed c'hoari 'oa dalc'het d'ar jestroù gwraet hag adgwraet, a vese ezomm anezo, sañset, pa n'oa ket mouezhioù da sikour kompren. Traoù hir forzh pegement, romantel-vezh pemp gwenneg, brizh santimantoù kartennoù-post gwilzh. (Ewid ar c'hartennoù-post filmet, emaint ataw ganeomp iwe, n'eo ket gwir, aotrou **Chabrol** ?).

Gwraet eo hon daoulagad hag hor spered gant ar filmoù a welomp bremañ. Ha gwir eo ez eus filmoù gwraet mad, hag a laka ananomp d'ar em santout toz tre ouzh broioù pell-pell, pe ouzh pennadoù kozh tre eus istor an denelezh... Ha sellad a raomp ouzh filmoù e-gis hemañ evel ouzh traoù degasset eus ur blianedenn all. Sed **Gwene-Pitiod** hag e gamaraded... Ha filmet gant ar memes den, daou vloavezh araog... Me 'gav din bezañ lemet o doa ranket aktourien vrudet targañ (1) pa oa deuet mouezhioù da heul filmoù. Estregeto zo, a soñjer warlerc'h ar film-mañ, 'n defe ranket ober.

**MORVRAN**. An trede film a oa **Morvan** e hanw, henn skrivet 'm eus dija. Sin vad an hanw-mañ, a gave din, ha da veur a vrezhoneger all er sal (a oa koulz lavared leun ewid an teir abadenn, ha bras resonabl eo ar sal).

Ma, ranket hon eus c'hoarzhin

p'hon eus gwelet edo troet morvan « la mer des corbeaux ». Eveljust... pa vezer o kaoseal ha « La baie des Trépassés », kwa. Ur c'hoarzh, ha plijst an disouezhenn.

Hag adarre, pa oa net tro da lenn war ar skramm edo **Molens** « une île sordide » ! Gwelloc'h nompas mont di da ziskouez ar film dezo. N'on ket bet c'hoazh e **Molens**. Med an dud alesse am eus bet tro da weled o deus plijet din kalz. Ha n'eus nemed an dud da weled eno.

Tro din da gondaññ ur sort koñvañsion film-varmerezh, hag a zispilj din kalz. Pa vez hanw eus ur filmer parisian a « ziskenn » beteg en-nomp-ni, ploukad ha troc'herien vuzhug sod, e vez daw menegñ pegen mad en deus gouvezet digoriñ e zaoulagad, pakañ gwirionez hag ene ar vro, en em wriziennañ e-toues an dud. Anfin, ur gwiskad trioù-lavar born evelse, ken tew ha ma c'heller lakaad amanenn war un tamm bara.

Gouest eo n'eus forzh pessor genou bras en deus arc'hant da baeañ beb a vanne d'an hanter eus tud ar vro. Med anavad e ene !

Ma, en desped d'ar pezh emeon o paoues skrivañ, plijet awalc'h en deus **Morvan** din. Da vihannañ, eno oa ken tanav ar steuenn a oa roet... ken e c'helle bezañ ankouna-c'haet aes tre. Setu e tigorena vras daoulagad da weled skudennoù eus buhez diavaes **Enes Sun** (rag anezi ez eus kaos) d'ar mare-se. Med chomet on war va c'hoant, rag ur film berr n'eo kên. Filmañ braw, skudennoù mor dirollet kær kernañ, med nebeud awalc'h a voued spered en oll.

(1) Ehanañ, chom a sav.



Epstein o filmañ e Breizh e-tro mare « Le tempestaire ».

## Paperenn ewid gouenn mont e-barzh UDB

Hanw hag hanw-badez .....	
Chomlec'h .....	
Gouenn a ran monet e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh	
D'an (d'ar) .....	19
Sin :	Da gass en-dro (troc'het pe adskrivet) da UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

LE TEMPESTAIRE. Ar peware film, **Le tempestaire**, berr adarre, zo bet filmet e-tro 1948, ma 'm eus soñj mad (kement ha lavared eo ral 'm bije l).

D'ar mare-se e oa aet ar filmañ un tamm braw war raog. Finnoc'h ar santimantoù, muloc'h a zegouez etre mouezhiou ha tud, pa ne ve ken.

Amañ avad on bet plijet kalz gant an istor. Kement ha kaoud ur vojenn, kenkoulz unan da vad. Hag unan vraw : tud hag a ouefze ar mod da lakaad gwall amzer da sioul-laad. Ha kalz gwelloc'h ez a ar film da sevel, tro-dro d'ar mennos diasez-mañ un aergelc'h krefiv awalc'h ha kevrinus. Un aergelc'h iwe ne vez ket savet artifihsiel a daoliou sonerezh sañset meurdezus, med gant trous gwir an awel e hunan.

Plijet din hemañ eta, med ne skrivin ket hirroc'h diwar e benn, rag ar pezh a welomp eus Breizh en di-adreñv zo konvanshionel penn-da-benn adarre, ha nebutoc'h lec'hiet eged na oa film **Heudig**.



E-barzh Finis Terrae, an daou vezhinier yaouank.

AR FESTIVAL. Skrivañ 'rin ur ger bennag diwarbenn ar pezh am eus gwelet e gis all eus festival **Dour-nenes** er bloaz-mañ memestra. « Festival des minorités cinématographiques », a lavare din un den eus ar vro ha n'en doa ket amzer da vont, med en doa « gwelet e gasetenn ».

Da gentañ, evel aousourien ar fes-

tival, on bet souezhet gant niver an dud aet iwe da weled filmoù **Epstein**. 'Oan ket o c'hedal bezañ va hunan, pa oa dauet « Marjan gamm », med a welet gant gentañ ar sal. Ewid an abadenñ gentañ n'oa ket pluss d'an oïl o doa c'hoant mont, zokén !

HISTOIRE D'ADRIEN. An abadenñ all nemeti am boa gwelet e oa enni, dreistoll, **Histoire d'Adrien**. N'oa ket kehiald 'm boa c'hoant gweled anezhi, anad eo, med un tamm mat muioc'h a vall 'm boa.

Feiz. Diaes eo delc'her d'ur c'hempoues, pa'z eus hanw eus ar pezh a blij d'un den, pe ne blij ket. Med kasimant 'm boa kavet blas ar re nebut. Kement ha diskouez deomp, hag eus an diabarzh da vad neuse, ur vro, 'm bije karet gweled muioc'h. Anad eo ne'm eus ket kavet hir va amzer, en oll.

Ha plijadur 'm eus bet o klewed yezh ok. Koulskoude e c'hellfen gweled alies awalc'h filmoù nann-c'halleg. Med ase n'oa ket memestra : ar bouc'h sirius kentañ e-barzh monopol ar galleg, roue e Bro-Frañs, e bedig ar sinema. Plijadur spered eta. Plijadur daoulagad ha diwskouarn iwe.

Ha seul vuioc'h a zipit o soñjal e galleg bras ar **March' Ourgouilh** adarre ! Koulskoude ne vanke ket kalz a dra... Afñin, ne vanke nemed hon yezh. E lec'h amañ evedo. Rag a-benn ar fin edon kement er gér gant okitaneg an dud-se, o yezh naturel, hag e vezan em brezhoneg, kwa. Ha gwirionez ne vanke ket kalz a dra da zislaberiñ anezhi, siwazh.

Na ped tra a vefe moian da gehveriañ etre an daou film-mañ. Peadra da skrivañ ul levr a vefe. Kenveriañ ar pennadig er skol, an eured, ar soudard o vont d'ar bresel... na ped tra a vez kavet en daou sort.

Seul dipitussoc'h, ya.

Mikael Madeg

Notenn. N'emañ ket o vont d'ober ur gentel yezh, war zigarez e skrivan e brezhoneg. Med pa vez kaset, pe skrivet, diwarbenn ur film, pe ul levr, e ranne gant ar ger « hanw », ewid ar pezh a zo e galleg « le titre ». Ar re a gav dezio e brezhonekoc'h ar ger « talbenn » ne wrolont nemed un tu eus ar yezh, amañ, ar « gwiskamant » gerioù disavaes, 'm eus aon.

**RADIO - U.D.B.**  
Tel. (16.98) 80.18.47

## KANŦV

E penn kentañ **Mezheven** ez eo aet da **Anaon hor c'hlenlabou-er kozh PER AR GALL**. Ganet e **Brest e 1914** (« Tu n'as pas connu le petit train patates qui serpentait dans la ville de Brest avant de s'engager dans le Léon: c'était une splendeur ! », ez eas Pêr ar Gall e-barzh ar « Royale » evel medissin war vor : an zav a rae bezañ bet tapet meur a gorfad aon epad ar bresel ; ar pezh ne lavare ket eo e oa bet ur martolod kaloneg ha dispont memestra, beteg kaoud ar groas-a-vresel hag al leijon-enor. Lod a lavaro ez eo « normal » ewid ur soudard pakañ medalennoù, ha lod all, lem-moc'h c'hoazh o zeed, a zispleg penaos e kav ar soudarded ar medalennoù-se e-barzh o f « paquetage » l. « Re wir eo l » a dou memes — e galleg — glabousserien nerzhus ar « chambre »-où soudarded !... Aes-soc'h eo lakaad an teod da vont en-dro moarvad eged chom seder pa vez ar marw war wel... Tregont vloaz e chomas Pêr ar Gall e-barzh ar « Marine ». Goude-se ez eas da vedissin al labour er Mayenne, hag abenn ar fin e reas e soñj dont da dremen ar peurrest eus e vuhez e bro gozh e dadou : e Plougernew, war harzoù a vourc'h (Croas Boulic), e lakeas sevel un ti newez, Gwalarn e hanw, hag eno en deus bet gwraet e zemeurañs, beteg ar fin diwez-zañ, pedost...

Rag, petra bennag ma oa Pêr Ar Gall ur paotr kaloneg (ar pezh ne vire ket outañ a vezañ un den hegarad ha madelezhus meur-bed), un dra en e greis, ar galon ewel mekanik ne oa ket eus ar re wellañ. Abalamour d'ar c'hozh tamm « palpitant »-se eo e oa aet da **Paris**, ma vefe oberataet. Siwazh ! Eno eo he deus kalon Pêr Ar Gall paouezet da gass ar gwad hag ar vuhez dre e wazhiennoù... Ne oa ket tonket da Bêr Ar Gall gweled en-dro e diig sioul, e Gwalarn ar vro... Deuet e oa Pêr Ar Gall da vezañ brogarour ha broadelour... en dro. Rag en e yaouankis dija,

pa oa e lisse Brest, e oa kroget ennañ an derzhienn-se, un doare klefved ar vro, na baoues ket goude-se da gass pistigoù er re a vez bet tapet ganti ur wech. Lennet gantañ levr **Morvan Lebesque** (Comment peut-on être Breton ?), e komprenas Pêr Ar Gall ne vez ket mouget ken aes ha tra an tan-se a garantez hag a grog en un den ewid e vro... Dont a reas a-benn da zeskiñ trawalc'h a vrezhoneg ewid henn skrivañ en un doare kasi direbech. War ar gomz ne oa ket ken prim, daoust ma teue braw tre ar yezh gantañ memestra. Mes moarvad ne grede ket re mont e brezhoneg gant ur « brezhoneger a vihanig », e-gis m'ema ar c'his da lared (dre m'emaomp moarvad gant an terminal speakers, di-zale e c'hello an newez-vrezhonegerion mont buan en tu all d'ar « vevh-se ». Ne vern penaos, reizh meur-

bed e vese e vrezhoneg komzet gant Pêr Ar Gall. Med ne vese en e aes da vad nemed dre skrid. Ma oufite mekanik-skrivañ Pêr Ar Gall komz, e klewtemp digantañ meur ha meur a dra, rag lakaet e vese da vont en-dro... A-wechoù e ouie Pêr Ar Gall kass lizheroù e brezhoneg war-eeun da bennou bras Paris (Debré, Peyrefitte, ha Giscard e hunan), mes lizheroù e galleg kenkoulz all, pa'n dese ket klewet pe lennet un dra diwir pe direizh diwarbenn Breizh. Alies en deus bet kaset din eilskridoù eus al lizheroù-se...

Savet en deus bet iwe pennadoù ewid **POBL VREIZH**. Ema ar roll anezoù e-barzh ur pennad savet gant Goulc'hann Kervella e koun Pêr Ar Gall (Al Liamm 207, *Gouere-Eost 1981*, pp. 237-244) :

— PV 94 : Klefved ar galleg ;  
— PV 96 : Arabad ober al lu... gant al lu ;

— PV 100 : Cointret e-barzh an UDB ;  
— PV 101 : Radio-Frankis ;  
— PV 104 : Biskoazh kemendall ;  
— PV 105 : Ul Lizher ;  
— PV 106 : A Enebour ;  
— PV 108 : Ar fasi denel.

Alies e pellgomze du-mañ (nebutoc'h war an diwezadod), daoust ma vese nec'het awechoù, o soñjal e tirenke ahanon : « Qu'est-ce que tu penses de ça ?... On ne peut pas laisser passer ça ! On devrait réagir ! Tu dois réagir ! L'UDB ne peut pas laisser passer ça ! ». Pêr Ar Gall, ne glevin ket mui da vouezh, o tegass din frealidigezh ha rebechoùgou tro-ha-tro, gant madelezh ha doujañs dal-c'hmad...

Pêr Ar Gall, un den bet chomet en e sav e vuhez pad. Repos vad d'e Anaon !

Fañch Morvanou

## BODADEG VEUR AR FALZ

Dalc'het eo bet bodadeg veur strollad **AR FALZ** e **LOKTUDI**, d'ar 6 a vis Gwengolo, gant un hanter-kant bennag a dud ; daoust ha ma ne oa ket niverus an isili deuet d'an emvod, ez eo bet bew mat an divisoù.

Displet en brezhoneg gant ar sekretour Paolig **KOMBOT**, e lakeas an oberiantoù war wel perzhioù fall ha perzhioù mad stourm ar bloazvezh tremen.

Bruderezh mad zo bet gwraet d'ar strollad embannadurioù **SKOL VREIZH**, en o zoues pederved lodenn Istor Breizh ha metod brezhoneg **Andrew KORNEG** war daolenn feltr (Liorzh ar brezhoneg) ; ar gelaouenn vrezhoneg **PLANEDENN** he deus kendalc'het da vezañ embannet ingal, daoust ma 'z eo bet nac'het reiñ dezhi un niverenn CPPAP. Ar stourm ewid hon sevenadur — araoz ha warlerc'h mis Mae — zo bet kendeuzet e-barzh heni an Talbenn Sevenadurel, bet renet ar bloaz-mañ c'hoazh gant **AR FALZ**. En desped da se, ez eo arabad nac'hañ ez eus bet un nebut diaestrioù : n'eo ket deuet er-maes ingal kelaouenn **AR FALZ**, nebutoc'h a dud o deus darempredet staj Loktudi, re a gargoù a boues war choug ar memes re. Evrusamant ez eo ya'ch



Paolig KOMBOT, sekretour meur AR FALZ

stad an arc'hant, evel ma 'z eo bet displeget gant an tehzorour, **Daniel GILLES**.

Diouzh an enderwezh e voe degemeret pewartennad :

— unan o c'hourc'hennet e vefe goulnet digant an dud, da-geñver niveridigezh mis C'hwevrer 1982, pessor yezh « rannvroel » komzont ;  
— unan all o c'houlenn e vefe adstaget al Liger Atlantel ouzh Breizh ;  
— an daou all diwarbenn an deskadurezh : goulna a ra **AR FALZ** e vefe krouet postoù kelennerien war ar brezhoneg, skolaerion o voned d'ar skol d'eben, hag e vefe, ewid ar brezhoneg, ar memes arnodennoù hag ewid an daneveziou all.

Ewid pezh a sell prisionid politikel Bro-Iwerzhon, e vo kaset lizhiri da **Simon Veil**, **Margaret Thatcher**, ha da republik Bro-Iwerzhon.

**SKOL VREIZH**, diouzh he zu, ne chomo ket dilabour, peogwir emae o voned da embann ur metod brezhoneg newez, heni **Jos KORBEL**, hag ul levr diwarbenn ar sevel tier war ar maes.

E penn strollad **AR FALZ**, ez eo bet miret ar memes skipailh-ren ha warlene. N'eo ket achu ar stourm, daoust d'ar chañkamant !



# LIZHEROU

... War an nivereñ dwezañ en deus plijet din kalz ar pennad-lenn a-ziwar-benn « An tri Aotrou », am eus kroget da lenn anezhañ, abalamour d'hoc'h artiki, ha ne'm eus ket bet keuz, hag e c'hellit va c'hredañ.

Abalamour ez eo ho kelaouenn ur gelaouenn « daonet » (netra da weled gant « Tri Aotrou » an Tad Medar), rag skrivet e brezhoneg hag o kasoal a bolitikerzh, hag abalamour ho peus poan arc'hant ewid klosañ anezhi, daoust ha ne yefe ket gwelloc'h deoc'h embann anezhi war ur paper simploc'h ha pas glaset 'gis bremañ ?

Da'm soñ, ar re a lenn anezi (eveldon-me) a oar petra 'raont (etrusamant l) ha ne raont ket foeltre-käer gant douster pe get ar paper. Martese e vefe un tamm nebeutoc'h a goll arc'hant. Martese ya, martese nann (ganet en en Normandi l), hag emichañs ho peus gwaet an dibab pell zo.

Ma ! Ewid klosañ al lizher, un tamm chekenn a roio un tamm kalon deoc'h, gwelloc'h ha yac'hoc'h eged ur banne Pernod pe Santa Rosa.

Kenavo ha c'hañs vad.

H. Arzel, Brest

Ewid ar Pernod pe ar Santa Rosa, n'omp ket sod gant, nann. Gant an dour kennebeud, pa larimp mad ar wirionez. Mad ha fresk e vefe, pa vez tomn an amzer ha sec'h-kras an traoù dindan an heol berw, ken e vez disec'het gourlañchenn an nen ha c'hoant gantañ torriñ e sec'hed di-zañjer... Med n'eo ket alies e vez ur sec'hor hag un tommder sorti-se e Breizh, betes lakaad ar Vretoned da vont war an dour ! Ahanta, vad he deus gwaet ho chekenn da gef' POBL VREIZH, hag he deus ! Er stad m'ema ar c'hef-se avad, n'o deus ket kredet ar re a ra wardro POBL VREIZH mont da lipad ur banne gwin kozh pe zaou gant gwerzh ho chekenn !

Gwir eo (hag abenn bremañ martese eo bet lennet ganeoc'h keleier « fall » ar bajenn 2), gwir eo n'eo ket druz ar peunñ ganeomp tamm ebed. C'hoas ur paper simploc'h ? Martese. N'eo ket ar paper a goust ker kement-

se. An eurvezh micherour ne lavaran ket... Sed ez eus 3 milion a lurioù kozh da baeañ d'ar mouler. An abretañ 'r gwellañ. Passianted en deus ganeomp, med memestra... Daw eo dezañ paeañ e vicherourion iwe, hag an taousoù ngerus a gouez war ar stalioù bihan pe etre...

Gwelet e vo. Da c'hortos e lavaromp trugarez bras d'hon lenner ha komanant ar Vrest, ewid e lizher hag e brofadenn. Ma hon eus tro d'en em weled, ez oimp da bakañ ur banne assemblies. Mes fae 'vo gwaet war ar Santa Rosa. Gwelloc'h dour c'hoazh !

## POBL VREIZH

### Kamaraded ker POBL VREIZH,

Poent bras eo din adkomantañ. Med deut eo war-un-dro « an amzer ma rankan dilesel va bro gäer Breizh-lsel », peotrament ober va c'hoñje, evel peb sitioan yaouank ha « yac'h », dindan heol lentig ar vro-mañ. Ha, war am eus lennet en ho kelaouenn, kenniget e vez ar c'homanant d'ar soudarded ewid netra. Interestet bras on eveljust gant ar c'hennig-se, peogwir ne'm eus ket re ar c'hant, evel meur a Vreton hiziv an deiz. Bez' e vezo emsavus ewid ur wech mont da soudard.

Va gwellañ gourc'hemennou ur wech c'hoazh da skipailh kaloneg POBL VREIZH, ewid e labour prisius hag e nerzh-kalon dirag an diaesamañchoù a beb sort a vez ouzh e drubuilhañ.

Ho kourc'hemennaouiñ a ran ur wech c'hoazh, med n'eo ket re, peogwir e vez frealuz, a gav din, kaoud ur wech an amzer, un tammig digoll eus e strivoù.

Chom a rin aketus da lenn ho kelaouenn, evel ma'z on bet dalc'hmad abaoe c'hwec'h vloaz. Kenavo.

Claude Rilly-Le Meur, Konk-Kernew

Moarvad eo bet Claude Rilly, hag a oa o chom e Blois d'ar c'houlz-se

(c'hwec'h vloaz zo eta), yaouankañ komanant POBL VREIZH : penn-zeg pe c'hwe-zeg vloaz e oa neuse (« Vous les prenez au berceau », evel ma lavare egile), ha laouen omp o weled e chom aketus da lenn ar gelaouenn bet diskoachet gantañ pa oa oc'h ober e gresk a baotr yaouank.

Trugarez dezañ neuse ewid e lealdad da gelaouenn e yaouankis tenerañ : fiziañs hon eus e kavo enni c'hoazh, kehidi ha ma vo oc'h ober e goñje, peadra da voueta e garantezvro. Rag, zoken ma vezer paket gant ar Stad, e chom gant ar soudard yaouank, gwizennet don en e galon, ur garantez ouzh e lakaad da gemer passianted : an heni a vaer ewid ar vammvro wirion.

Eveljust e vo kasset POBL ewid netra d'hor c'henvroada yaouank.

## POBL VREIZH

Ur gartenn zo bet kasset da b-POBL VREIZH gant unan eus lennerion ar gasteenn. Siwazh, dilemmabl eo ar sinatur : « Salud deoc'h ha gourc'hemennou digant unan eus ho lennerion a ra gant ar voutadegzh. N'eo ket mad tre va brezhoneg marteze, med plijusoc'h eo din skrivete deoc'h e brezhoneg. Plijadur 'raf e din gweloud ar gartenn-mañ embannet war b-POBL VREIZH, mard eo posibl. Trugarez vras deoc'h ». Bez' ez eo ar gartenn ur « vue extérieure du Centre Européen de la Nichiren-Shoshu, Campagne Longard, Trets (B.-du-Rhône) », gant, siwazh, ar meneg « Reproduction interdite » ! Domaj eo, rag braw tre eo ar greisenn-se 'vel m'eo luc'hskeudennet war ar gartenn...

## DIVANKADENN



Ur fazi zo bet gwaet ewid ar pezh a sell leizhidi ar foto bet embannet war niv. 135 ar gelaouenn : n'eo ket d'an 21/6 eo e oa laouen assemblies P. Jagoret, deput-maer PS Lannouan ha L. Kervoas, kusulier UDB ar memes ti-ker, med d'an 10/5, an dewezh m'eo bet trec'h Mitterrand war Giscard...

# An emrenezh ewid Breizh

A et eo an traoù en-dro e Paris epad an hañv, ha red eo an zav n'eo ket chomet dilabour paotred — ha merc'hed — ar gouarnamant newez... E-kehid ha ma oa an dud all e vakañsoù (pell diouzh ar ger, pe er ger, rag forzhig tud a chom heb partial), e talc'he meur ha meur a vintist da stagañ gant al labour diaeseañ ur Frañs newez, sossialist tamm pe damm...

Moarvad ez eus bet roet un tammig lusk bennag d'an digreisañnañ. D'an nebeutañ ewid an enesenn Gors. Rag newez a-grenn eo, e-barzh doareoù-ober ar Republik unvan ha distannadus, ar mennos e hunan, netra nemed ar mennos eus ur « statud ispisial » ewid ur « rannvro ». Rag beteghenn ne oa Korsika nemed ur rannvro evel ar re all, evel ar Berry (lakaet e-barzh ar mell pezh rannvro, « Centre », ne vern penaos), pe ar Champagne-Ardenes. Kenniget en deus Defferre eta ur « statud » ewid enesenn c'hennig Napoleon kozh, anezhañ abendall gwasañ kreisennour a zo bet biskoazh abaoe ma 'z eus eus ar « Republik »...

N'eus bet friket mell ebed avad e-barzh ar chadenn a stag Korsika douz ar Frañs : laosket eo bet ar chadenn hebken. Ha pezag Korsika, ha Korsika hebken ? Dre ma 'z eo un enesenn, eme paotred ar PS (ur c'hañs war wel neuse ewid Eussa hag ar Gerveur l)... Dre m'eo Korsika ar rannvro nemeti m'en deus an emrenezh un diazeb poblenni, ez eus bet respontet c'hoazh... Tud all zo aet betek lared, a vouezh uhel awalc'h, o deus bet an tarzhadennoù un eved politikel bennag : bez' e vefe ar statud neuse ur gopr, ur yalc'had roet e prof d'ar gwall-nerzh... Mad käer ewid Korsika memes mod...

Moarvad ez eo afer statud an enesenn Gors un degouez istorel e-barzh istor ar Republik Gall. Petra bennag m'en deus distekleriet Defferre ne oa bet gwaet kammed ebed treme ar c'hrevredañ. Gwazh-a-se ma 'z eo gwir. Med martese n'eo ket gwir penn-da-benn. Moarvad en deus klasket Defferre sioullaad ar re washañ e-toues Jakobined ar Gamp, ha zoken ar re a gaver stank awalc'h e-diabarzh ar PS. Diaes meurbed e vefe bremañ mont war gil, hag ur gwall gorfad a ray Debré hag ar re all gant ar c'hoz tamm statud-se...

Mes ur goullenn memestra. Daoust hag-ehv e vo red d'ur « rannvro » bezañ enesenn ewid kaoud ur statud ispisial ? Ha gourenes Breizh « mor en he zro, koad en he c'hreis » n'eo ket trawalc'h ez afe ar mor d'ober he harzoù war an tri-c'hard anez ? Bezomp sirius : un dra zo n'eo ket bet anavez gant Defferre diwarbenn Korsika, eo ez eus eno UR BOBL. Un dra zo n'eo ket bet anavezet biskoazh abaoe ma 'z eus eus ar Republik, eo ez eo bet « gwaet » ar Frañs gant meur a bobl disheñvel. Trawalc'h eo gwelloc'h e chom « c'hoazh » meur a yezh er Stad C'hwec'hkogn, lod anezo disheñvel krenn diouzh ar galleg, da skwer an euskareg hag ar brezhoneg. Hag ez eo bet a-viskoazh ar yezh unan eus diazezoù ar bobl. Mes ur ger ken amjestr hag un ebeules yaouank eo ar ger POBL. Pa vez komzet eus « le peuple de Paris », peurluiant e vez klasket ober hanw eus « les masses laborieuses concentrées dans la région parisienne », pe, en un doare gwanooc'h, « la population française qui habite et travaille à Paris et dans sa banlieue ». Ha pa gomz ur ministr bennag, pe memes Mitterrand e hunan, eus « le peuple breton », ne lavar netra ouzhpenn, med ha dre zemagogiezh e vefe. Abendall « le peuple français », petra eo, herwez an danvez hanwet « gwir », ma n'eo ket « l'ensemble des habitants de l'Hexagone jouissant de la citoyenneté française » ? Ahanta, roñf a raomp ni ur ster all d'ar ger POBL, hag e lavaromp ez eus e-diabarzh ar Frañs, hag e-

diabarzh « le peuple français » endeeun, meur a bobl, netra nemed dre ar yezh : Breizhis, Korsikis, Ellassis, Katalunis, Oksitanis, Euskaris, pa ne ve ken, setu kementall a bobloub diverket, nac'het o gwirioù, o fersonelozhioù, dezo galloud ebed evel pobloub...

Ha setu perag, en diaveas eus ar pezh a zo bet gwaet ewid an enesenn Gors, ne weler netra, e-diabarzh ar rannvroledur a zo war ar stern, o telc'her kont eus ar fed kaled-se, ur fed hag a lak anad ez eus er Frañs pobloub n'int ket anavezet ent politikel, ha n'eo ket der zegouez eo emma ar pobloub-se pellic awalc'h diouzh ar « pré carré » hanwet Paris, ur « pré carré » bet staget douañ (dre an nerzh, gwidreou ha finessaou a beb sort) ar peurstes eus ar « Frañs ». Bez o deus ar pobloub-se « gwirioù », ha dreistoll ezommoù bras : war dachenn an ekonomiezh, war an dachenn sossial, war dachenn ar yezh. Ewid ar pobloub-se — hag emma Breizh en o zouesk — n'eus ket trawalc'h eus ur rannvroledur boutin hag untom...

Sed e c'houlloennomp bremañ c'hoazh, ha muioc'h eged biskoazh, an emrenezh ewid Breizh. Rag, kehidi ha ma ne c'hello ket ar geodedis eus ar Frañs hanwet Bretoned EN EM REN o hunan, e vint evel minorod, red dezo leusker tud all da c'houlzout en o flass ar pezh a zo mad ewite. Eus Breizh hag eus ar Vretoned eo e telc'hus dont, ha n'eo ket eus Paris, ha n'hon devez ni nemed sentiñ d'ober goude-se. Aet omp skuzh o sentiñ : felloud a ra dimp bezañ mestr en hor bro. N'eus danjer ebed eh en em zistagfe hor gourenes diouzh ar c'hevandir, da vont Doue e-diabarzh ur c'hentrollad brassoc'h, Frañs pe Europ. Hag e chomo, ne vern penaos. Koulskoude, ma c'hell al Luksambour, gant e 360 000 a dud, kaoud 6 kannad e Parlament an Europ, hag ober wardro e aferioù, ha bezañ sellet evel ur « Stad di-zalc'h », daoust ha Breizh n'hellje ket bezañ ken di-zalc'h all ? Ha muioc'h, sur, war dachenn an ekonomiezh... Ma vefe adkemeret gant Breizh he mestroni war ar mor, na pebezh lamm war-raog e vefe gwelloc'h ober ! Huihvireoù ?... Martese : mes a-wechoù e teu un huñvre da wir...

Hag e c'houlloennomp un emrenezh eus an tu kleiz, da lavaret eo unan o klask mad labourerien Vreizh arag peb tra. O klask lakaad labourerien Vreizh e-barzh ar jeu, o roñf an tu dezo da lavaret o soñj, da bouesañ war an divisoù, da gemer pezh en divisoù en un doare gwirion ha leun a eved.

Bez' e telc'he ur Vreizh emren bezañ anavezet ewid Breizh e-diabarzh an darempredoù a beb sort (ekonomikel, kulturrel) a weler skoulmet un tamm e peb lec'h... Mont a ra pokesi Breizh betek broiour ar Reter-Krenn. Ar pokesi, mes pas banniel Breizh c'hoazh, med hag e kuzh, pe bihanbihan dindan heni ar Frañs... Emma ar c'his bremañ eus ar c'hriou « gevellet ». N'eo ket ur c'his droc'h penn-da-benn e bez' e c'heller awechoù, dindan mantell Noe ar gevalladur, distagañ un nebeud komzoù fraezh o tiskouez ez eus c'hoazh eus pobl Vreizh, dreistoll pa vez gevellet kêrioù zo eus Breizh gant roñf all eus Kernow, Kemble, Skoss pe Iwerzhon. Daoust ma vez disheñvel mat alies ar c'hudennou en tu-mañ pe en tu-hont eus mor Breizh, da vihanañ e c'heller kas war rag etrevroadel ar pobloub gwasket...

Ewid lared ar wirionez, ur mennos modern meurbed eo an emrenezh : ur c'hammred ouzhpenn, ur c'hammred red war dachenn an demokratiezh...



**sadorn**

teatr Penn-ar-Bed

**IDIR**

**Korolladegoù DIHUN**

**NAPHTALINE**

**PATRICK EWEN**

**CLAUDE NOUGARO**

**Fest-Nos vras**

**Gant ar Bleizi-Ruz - Kanerien Vrasparz**

**kanerion Bro-Gwened**



**3-4 a vis Here**

**Brest**

**Gouel pobl Vreizh**

*(tachenn Penfell)*

**sul**

**BASHUNG**

**Bagad Brest Sant-Mark**

**Yvon ETIENNE**

**Teatr : Strollad ar Vro Bagan**

**QUILAPAYUN**

**Epad an daou zewezh : standoù e-leizh**

artisanslezh - c'hoarioù - boued ha banneoù - abadennoù ewid ar vugale

**sinema diskouezadeg : bandennoù tresset Breizh**

